

CHAPELED

PE

CURUNEN

HON ZALVER


JESUS-CHRIST.



E MONTROULEZ,

Eus a Impr. LÉDAN, e traon ru ar Vur.

O CRUX, AVE!



[SPES UNICA.



CHAPELED

PE CURUNEN HON ZALVER

JESUS-CHRIST.

AR Chapeled-mâ a gonsist e teir *Bater* ha trêgont, e memor an tri bloas ha trêgont a basseas Jesus-Christ var an douar, ha pemp *Ave Maria*, en enor d'e bemp Gouli sacr.

Ar Chapeled n'en deo composet nemet eus a deir Dizenes : e gommanç a rêr en eur lavaret un *Ave Maria* var ar c'hreunen guenta pe var ar Groas eus ar bouchon, goude e passeer an teir c'hreunen vian, pere a vez lezet betec ar fin, hac e comancer an Dizenes qenta, en eur lavaret var bep greunen eur *Bater* hep *Ave Maria*; an Dizenes achu, e lavarar un *Ave Maria*,

var ar c'hreunen vras, hac er memes fêçon
var an diou Dizenes all. Er fin e vez lavaret
teir *Bater* var an teir c'hreunen a zo e qi-
chen ar bouchon, un *Ave Maria* evit a-
hui, hac ar *Gredo*.

An Devotion gaer-mâ; qer brudet dre
an Ilis Universel, a so bet inspiret da eur
Religijs santel gant Jesus-Christ e-unan,
evel eur voyen an excellanta d'en enori,
ha da obten deus an En faveuriou ar re
rassa evidomp bon-unan, evit hor c'he-
vent, hor mignonet, hac evit an eneoù a
zo poanniet e tân ar Purgator.

En effet, ne domp netra hep an Antrou-
Doue. Ne allomp obten netra nemet dre
Jesus-Christ, e Vab unic; ret eo deomp
eta anavezout ha medita alies ar Mysteriou
eus a Vuez hor Zalver. Hoguen, cetu ar
pez a dleer da ober en eur lavaret ar Cha-
peled-mâ: an niver bras eus hor pec'he-
jou, hon ezomou propr. Miseriou ar vuez
presant a dle hon angaji da ober alies re-
flexionou serius var ar pez en deus Doue
anduret evit hor savetei. Pa ver poanniet,
chagrinet, persecutet, disprijet ha goapêt
gant ar bed, pebes consolation evit eur
C'hristen mad sonjal penos e Vestr divin

ne deo qe bet trêtet guelloc'h, ha penos ar c'hroasiou, an afflictionou a andurer er bed-mâ evit an Autrou-Doue, a zo an hent surra evit mont da Rouantelez an En.

Ouspen se, Chapeled hor Zalver, aprouvet gant calz a Babet, a zo privilegiet eus a galz a Induljançou. Ar Pab Leon X, Gregor XIII ha Sixt V, o deus accordet meur a Induljanç d'an nep a recito devo-tamant ar Chapeled-mâ. Clemant X o accordas oll a nevez hac a berpetuite, dre eur Bref special, d'an ugent eus a vis gouere 1674. Ar re brincipala eus an Induljançou a zo :

1°. Un Induljanç Plenier en articl ar maro, d'ar re pere, contristet ha glac'haret eus o fec'hejou, o devezo cōvesset, hac a invoco, da viana a galon, ma na ellont en ober a c'henou, an Hano Santel a JESUS, e condition gouscoude ma o devezo recitet eur vech epad o c'hlénvet ar Chapeled en intantion da c'hounit an Induljanç.

2. Un induljanç Plenier evit ar re pere, goude beza recitet ar Chapeled bemdez epad eur mis, a choaso un devez er mis-se evit en recita a nevez, ha goude beza

côvessêt a gommunio hac a bedo evit hor Mam Zantel an Ilis.

3. Ar Pab Innoçant XI en deus ivez accordet un Induljanç Plenier d'an hini a zougo hac a vezo custom da lavaret da viana eur vech ar sizun ar Chapeled; an Induljanç-se a eller da c'hounit en eur acquitta ar c'honditionou ordinal, da zevotion Nedelec, da Zul ar Rouane, d'ar Yaou-Basq, dar Pantecost, da Zul an Drindet, da Vouel ar Sacramant, da Voueliou ar Burification, an Annonciation, an Assomption, ha Guiniveles ar Verc'hes Glorius Vari, da Vouel S. Yan-Badezour, da Voueliou an Ebestel S. Pêr, S. Paul, S. Andre, S. Yan, S. Thomas, S. Philip, S. Barthele, S. Vaze, S. Simon, S. Jud., S. Jacques, etc. (1)

Beza e zeus c'hoas calz a Induljançou pere ne dint qet rapportet amâ, hac a eller da c'hounit evit soulajamant ha delivranç an eneou eus ar Purgator.

(1) Tennet eus a Levr an Induljançou, gant an A. Bouvier, pagen 158.

MYSTERIOU.

Buez hor Zalver Jesus-Christ , pehini a eller da gonsideri ha da vedita en eur recita an 33 *Pater* eus ar Chapeled. Ar 5 *Pater* a lavarer en enor d'ar 5 Gouli. Convenabl eo , en eur recita anezo , sonjal e *Mysteriou* ar *Bassion*.

QENTA DIZENES.

1^o *Pater*. Guiniveles hon Zalver Jesus-Christ er c'hraouic a Vethleem.

2^o *Pater*. Jesus adoret gant an *Æles* ha bisitet gant ar *Bastoret*.

3^o *Pater*. Circoncision Jesus-Christ.

4^o *Pater*. Jesus adoret gant ar *Majet* ha *Rouanet* an *Oriant*.

5^o *Pater*. Jesus presantet en *Templ* a *Jerusalem*.

6^o *Pater*. Jesus a dec'h en *Egypt*.

7^o *Pater*. E zemeuranç en *Egypt*.

8^o *Pater*. E zemeuranç e *Nazareth*.

9^o *Pater*. Jesus o tisput ouz an *Doc-toret* en *Templ*.

10^t *Pater*. Jesus a obois d'ar Verc'hes
ha da Sant Joseph.

Ave, Maria.

EIL DIZENES.

1^t *Pater*. Badiziant Jesus-Christ e ri-
vier Jourden.

2^t *Pater*. Jesus a yun en dezert epad
daou-uguent devez.

3^t *Pater*. Jesus a bermet d'an diaoul
e denti.

4^t *Pater*. Jesus a brezeg e Aviel.

5^t *Pater*. Jesus o conversi gant ar be-
c'herien.

6^t *Pater*. E Viraclou.

7^t *Pater*. E Dransfiguration var Menez
Thabor.

8^t *Pater*. Jesus a scuill daëlou var ar
guær a Jerusalem.

9^t *Pater*. Jesus a gonvertis Mari-Ma-
dalen.

10^t *Pater*. Jesus a ressuscit Lazar, maro
abaoue pêvar devez.

Ave, Maria.

TREDE DIZENES.

1^a *Pater*. Jesus a antre triomphant e Jerusalem.

2^a *Pater*. Güelc'hi a ra o zreid d'e Zisqibien.

3^a *Pater*. Institui a ra ar Sacramant Adorabl eus an Auter.

4^a *Pater*. Jesus en e angoni a bed er Jardin Olivet.

5^a *Pater*. Jesus trahisset gant Judas.

6^a *Pater*. Jesus cunduet dirac an tribunal.

7^a *Pater*. Jesus flagellet a doliou fouet.

8^a *Pater*. Jesus exposet dirac ar bobl, guisquet e ruz, eur gorzen en e zorn hac eur gurunen spern var e benn.

9^a *Pater*. Jesus condaonet d'ar maro.

10^a *Pater*. Jesus cunduet da Venez Calvar; eno eo crucifiet hac e varv evidomp.

Ave, Maria.



AN TEIR GREUNEN DIVEZA.

- 1^a *Pater*. Resurrection hor Zalver J-C.
 2^a *Pater*. E Ascantion en Envou.
 3^a *Pater*. Ar Speret-Santel a zisqen var
 an Ebestel.

Diveza Ave, Maria.

Assomption ar Verc'hes Vari en En.

E. M. Ar re n'o defe qet eur Chapeled spicial
 evit an Devotion-mâ, a elle en em servicha eus a
 eur Chapeled ordinal, en eur guemeret an teir Di-
 zenes qenta hac ar greun eus bouchon o Chapeled.

FIN.





ME HO SALUD, O VA JESUS!